

FRAGILITE AN DUD YAOUANC



620 B

90

Var eun ton rigolo

Ni boa eur hoguic yaouanc oa duman guenem-ni
Oa commanset do gana, mes brema na ra mui
Eun nozvez goude e goan, o tont eur zonzj ne ben
Me a renk mont an noz man, var digare pourmen.

Me renk ober eur bale, eun droyal var ar mez
Da glask e merh Perina, digant an intanvez
Me guir ou hanvet coguic, gant oll dud ar vro ma
Me garfe caout eur bolez, vit nem zivertissa.

Pa meus tapet an hano, a goguik vit partaj
Vo ret din caouet parrez, da gomans ma menaj
Perin merh an intanvez, hounez a zo dam grad
Kannerez a danserez, brillant e daou lagat.

Bonsoir dehu intanvez, setu me deut exprez
Da glask ho merh Perina, da hanter tiegez
Rag keit a ma vemp yaouanc, or be contamant
A plijadur assembles ep chagrin na tourmant.

Ma merh me zo abredic eur blavez hoaz
Mar de contact ar buguel, me na ranket a gaz
Kousket eo en o guele er pen draon an ti
Monet a ran de havet, da houlen diganti.

Arsa ma merch emozi, na din me levered
A houi zo contact paouric, de gavet eur pried
Berroh kaffet an amzer, breman epad an anv.
A toma doh o kuele, goude pa zeui ar goanv.

O ya va mamm emezi, certain me zo contant
Demeus a greiz ma halon, da gaout eur pot yaouank
Mar dsi caner a danser, ac eur pot delicat
Neuze a meus esperans, d'ober tiegez mad.

Neuze ar pot yaouank man, a zo jaout ha guie
Ac a zistroaz d'ar gaer, hed an hend neur gane
Penos eta yan goguic, te zo bet o vale
Eun tam mout divezat, o hanons domg an de.

Neuze zistroat ouziu, gant eun air da hoarzin
Mar de guir on me koguic, houi so eur louarn fin
Houi pefe eur vadelez da vont breman ractal
Da anez ma dimezi, betec ar presbital.

Ar hoarz var ma muzellou, pa non ket vit miret
Ya va mignon emezan, me rei ze na reket
Monet a ran evidoh, betec ar presbital
Rac merh an intanvez, evidoh ne ket fal.

Bonjour doh aotrou person, me a zo deut gant prez
Da hout a houi zimefe, eur hoc ac eur bolez
Pere s deus desir bras, da veat unisset
Eun tamic a zo dija, o deus en em choazet.

Neuze a respontas d'in, ive neur vous hoarzin
Deus aman abarz zal, kemer eur bane guin
Ercet ezout bepred, eun tamic de keyyer
A teus klevet jamais, ve dimezet ar yer.

Eskuzit aotrou person, ma meus drouc parlatet
Malheur eo dandud yaouanc, pere zo leshanvet
A re a barlanton doh, a zo daou zen yaouanc
A zezir be unisset, vel diou galon gontant

Ar re a barlanton doh, zo mal a fumelen
A zezir bea staguic, gant ar memez chaden
Unan ane triveh vla, an hini all pemzec
Zo pell zo bras en hirvout, hortoz be dimezet.

Ma et dar guer ma mignon, lar de dont dant illiz
A me o interrojo, var dern a hatekiz
Pa ergoulet digante, a na ouient netra
Demeus ar sakramanchou, a re brinsipalla.

Filt dar ger bugale, evit eur bloa pe daou
Da hortoz ma po desket, dern ar sakramanchou
Neuze zavas e ziou skoa, me a gred a zonzj
Ean druez eo emezan, dimezi bugale.

Neuze a zeuont dar guer, o daou en eur ouela
Ret a vo demp emezo, donet da studia
Ret a vo demp studia, couls an de ac an noz
Mat ouefomp ket re neve, ni ze-ko a re goz.

Tri pe bevar miz goude, a ya an intanvez,
da gaout an aotrou person, da lard an tol evez
Rac va merh zo languissant, eun tammic zo dija
Seul vui avans e klenvet, ya beped var vella.

Sein an aotrou person, dezi neus lavaret
Lavarit dezo dont hoas, ac a vont dimezet
Houi a fad daou zen yaouanc, a lavar ar person
Ar oar nem gonvertissa, ep mont d'ar mission.

Ar memez tra ez int bet, dimeed ac eureujet
Gras da vea eürens, keit a vont var er bed
Bonheur a zeziromp de, keit a vont er bed ma
A goude pa vont maro, er gloar de jouissa.

FIN

CORENTIN BOUARD.

Tous droits réservés :

GUILLERMIC Yves.

CHANSON NEVEZ

BOKET AN EURET



1^{er} Couplet

Dont a ran da houlen iscus diganeh compagnones
Evit ma canimp eur boket ma vemp oll assembles
Mar plich ganeh dont dam selaou en enor dandaouden
Azobet eureujet hirie deus toalar sacramant. [yaouanc

2^e Couplet

Beza ze eïste tremenet a boe ma voan avertisset
Na da zont betek ama evit azista an euret
Pa voa naveur hanter zonet hac ar vreg yaouank guisket
Evit mont betek an ilis evit bez eureujet.

3^e Couplet

Ar paot a enor hag ar plah a enor zo en kreiz an ti
Pa deus groet o hompliment zo prest de hondui
Mes homan zo eur plah fur eur plah eleuet mad
A deuz astennet e fajou evit mont betek e zad.

4^e Couplet

Reï a ra dezon eur briata deus a greiz e halon
Pa deus accordet dezi e venediction
Dizrie a ra deus e mam pehini neus e ganet
A zo bet en risk e buez deus e lakat er bed.

5^e Couplet

Reï a ra dezi eur briata ad dour ne daoulagat
Petra dall diman skuït daerrou pa renkan ho kuitad
Quar me zo choajet gant Doue vit chauch position
Ho tont do knitad ma zud kez ai glaharet ma halon

6^e Couplet

Dont a ran da laret adieu da mi da mam a ma zad
Leh ma hon bed maguet sansourei hac ive eleuet mad
Lezet gane ma liberte dont dan ebad a dan dans
Mes breman renkan dilezi ma ol acustumans.

7^e couplet

Chom a rin gant ma labour a lezel an dançou zo
Me bedo an dud da vont brema da di Doue
Len evit achui ar zermou deus ar fidelite
A zo entre an diou durzun l ar rest deuz ho buez.

8^e Couplet

Na pa hai barz er quer ma hai roët ar boket
Da verh eua deus an ti man zo hirie eureujet
Ar verh hena deus an ti man zo eureujet hirie
A neuz ket ur plah er baros unan ken fur a hi.

9^e Couplet

Pebeus devez kaer evidoh hirie eta greg yaouanc
Partout dre leh ma tremenfel ver dech obeissant
deus ar parkou hac ar prajou ve guelel ar zeblant
Oll a gustafai ho labour vit mont d'ho kuelel greg
[yaouanc.

10^e Couplet

Neuzai tenyo ar varhadourien a gantai pep a baner
En neur dorhai ho daoulagad evit ma velfont scler.
Evit guelet an diou famil zo assemblez unisset
Evit ober anoudeguez deus ar Marhad ha peus gred.

11^e Couplet

Na pa velon en pesorl stard nem larh ar vreg yaouanc
Prest a zini dont de regali deus a sort et deveus hoarl
Profitet demeus a deman ho vreg yaouanc eureujet.
Ar zunman zo evidoh mes e ben all ne vo ket.

12^e Couplet

Souhaite ran deh ar yehet eve prosperite
Chanj a bonheur n'ho menaj hac union entrezai
Mes mar deu ar maro da lakat fin d'ho buez
Souhaitan dezai chanj padus en gloar an eternite.

GUILLERMIC.